

JAKÉZ  
RIOU



**GORSEDD  
DIGOR**

**EMGLEO BREIZ**

**N° 45**

**BRUD  
1973**

# **BRUD**

## **ar Yez hag ar Vro**

(4 niverenn ar bloaz)

Komanant-bloaz .....	30 l.
Komanant-skoazell .....	35 l.
Studieren, Soudarded .....	20 l.
An niverenn .....	9 l.

*Renner-Tenzorier* : P.-M. MEVEL, 14, strêd Breiz-Izel, 29 N Brest  
K. R. P. 1499-55 Roazon

*Sekretour* : A. MERSER, 6, strêd Beaumarchais, 29 N Brest  
(Kas an dornskridou d'ar Sekretour)

**Pêit ho adkomanant**

*N'hellom ket moullan brezoneg hep arhant*

Golo an embannadur-mañ a zo bet treset gand **P. Péron**

# Brud

ar Yez  
hag  
ar Vro

Niv. 45

DISKAR-AMZER 1973

### JAKEZ RIOU DA VARE AR HORSEDD-DIGOR

E kerz red-micher berr ar skrivagner Jakez Riou, ar bloavez 1928 ez eus outi eun amzerenn a bouez. Er bloavez-se, evid gwir, eo embannet *Gorsedd-Digor*. Hogen, n'eo ket mond dreist ar wirionez pa zivinner penaoz, er pezh c'hoari-ze, eun arvest enni hag a hell tremen d'eun devert-amzer dister a-walh, oberour da zond an *Nomenoe* a renk skler e gonchou gand taerijennou e yaouankiz hag a gimiad, war eun dro, diouz an dud hag ar menozioù a gas, d'ar mare-ze, an emzavioù breizeg pe ar pezh a c'hoari evito. Gand an taol-ze, setu stoliet an droug-sperejou briz-keltieg atizet gand an harlu e Bro-Spagn, setu trehet hoaladurioù ar ginkallerezh fals-varzel ha seiz rabadiezh al lennegezh e brezoneg a ra o reuz abaoe eun hanter-kantved hag ouspenn, setu adkavet ar mammennou-pobl a rede en e greiz hep gouzoud dezañ, setu o tarza, war an diwez, eun ijin-barn ma ne zizalho ket dioutañ beteg ar maro.

Emañ Jakez Riou oh en em gavoud gantañ e-unan. Echu e amzer deskard hag e douelladurioù taolet kuit, emañ o vond da staga gand eun oberenn kroget striz ouz gwirionezh Breiz ha ne bako ket kalz a dra digand re all estregetañ. E diouer da veza eun skrid-spisa (ne ra foeltre-kaer an oberour gand mennadou da ziskulia ha padal e-neus outo moarvad), primdresadenn farsuz *Gorsedd-Digor* a zo eun digarez evitañ da skuba war e lerh. Eva raio, hiviziken, en e skudell heh-unan, e jistr Lotei. Ha gwaz-a-ze evid gwin ar Hallaoued !

Preñv ar brezoneg a oa kroget ennañ e Bro-Spagn, o sila dezañ eur c'hoant-gouzoud entanet,

diwalh, e-keñver diabellou teñval eur zevenadurez bahet en toull-kuz ha m'en em gave a-greiz-oll kaoud an herez outi. Epad bloaveziou, Tadou Kalonou Sakr Pikipuz o-doa dalhet ar brezoneg (hag ivez an euskareg hag an okitaneg) er-mêz deuz studioù ha zoken divizou o skolidi. Iskisa tra, heulia a reent evelse politikaj Bro-Hall, hag int bet harluet gand ar Hallaoued. Ha da houde eun outo, an Tad Wilfrid Müller, a gemennas groñs da bep hini pleustri war e yez-vamm dre ma oa tonket dezo mond da visioerien ha prezegenni d'ar pobladoù e bep seurt yezou ouspenn hag ar galleg pe ar spagnoleg. Adaleg neuze e kenstrivas on tri skrivagner da zond, Jakez Kerrien, Youenn Drezen ha Jakez Riou, evid ober kas dezo, euz o bro, leoriou ha kelaouennoù e brezoneg. Eun Tad Bolzer bennag a vroude o atizadur beteg dreist-penn en eur lenn dezo pennadoù euz ar *Barzaz Breiz*. Ma lakeer ouspenn êrgelth enket skolaj kristen Miranda de Ebro ha dremmadou taer Kastilla Goz, n'eo ket diêz klevoud e-neus dibabet Jakez Riou, evid arnodi da genta gand ar varzoniez, al lesano BARDOS RI-WALL (arabad lezel ar varrennig da goueza, mar plij !) ha taolet er-mêz, war desteni Youenn Drezen (1) « pemp kant gwerzenn gand korn-boud ar brezel, TREMEN AR BRENN (barnit ouz ar vogalenadur hag ar hensonadur !). *Gorsedd-Digor*, kalz araog an *Nomenoe*, a varno d'ar maro ar brenn-ze hag ar barz Ri-Wall war eun dro.

Jakez Riou, e gwir, o tistrei deuz Bro-Spagn, e-noa gouzañvet eur gwall gerseenn. Hekleo ebed euz gwerziou ar *Barzaz Breiz* ne oa chomet er spe-rejou nemed eun ton bennag amprestet gand an Tad Barnabe, Kabusin, evid e gantikou a skouer gristen vad (Lez Breiz, Ar Chas a glevan, h. a.). Ha c'hoaz ne ouie ket ar gristenien ma oant randonet dezo epad ar misionou euz a beleh e teuent, me ma-unan da dest. Youhal a reed *War Zav* amañ, aze hag a-hont da zivenn feiz on tadou koz nemetken. « Ar Brezoneg hag ar Feiz a zo Breur ha C'hoar e Breiz ».

An danvez-misioner bet a gleve mad kement-se. Meizoud a ree koulskoude ne oa aze nemed eun dremm euz ar gudenn ha gouest da skoulma homañ evid mad en eur zavel ar Gatoliked enep d'ar re all. Eun dister a lennegezh vrezoneg a oa kaset dre ar gelaouenn sizunieg « Le Courrier du Finistère » ha dre romantou Loeiz ar Floh, skrivet e brezoneg mad, « hogen ken divlaz, ker goullou, ken enoeüz o danvez ma oa eun druez » (1). Selaouom Youenn Drezen : « bez e oa ivez *Barzaz Taldir* pe, evel ma lavare Jakez Riou, « Ar Zant Plastr hag ar Bourhiz Lorhuz » (2). Merkom, en eur vond, e oe an Taldir-Jaffrennou-ze an Drouiz-Meur epad pell. Ar pezh a oa da hounid diwar seurt magadurez lennegezh a dalveze gwasoh eged netra. Mad da goll blaz ar brezoneg. A-dreuz e liziri, Jakez Riou a daol klemmou c'hwero diwar-benn eun didalvoudegezh ker mantruz (1). Evid ar pôtr-yaouank-se, bouetet diwar oberou klasel, lenner aketuz al leoriou braz ha galvet e-unan da skriva, ar brezoneg a zelleze gwelloc'h planedenn. Ha Youenn Drezen a lavar da echui : « livet e-neus en e *Horsedd-Digor* ar vriz-skriverien-ze, mad, dres a-walh, da veuli ar brezoneg evel ar Barz-Diouganer, divarreg ma 'z int da denna implij euz « eul langach ker brao, ker respetet gand an oll... ». Re wir eo, penn-da-benn gand prezegennou ha divizou ar varzed lakeet gantañ war al leurenn, an treuztresou galleg a darz ken fonnuz hag an tign : *apel, listenn, desedet, volonter, dispariset, patriotikoh, epouvantabl, reuniset, dre vuzur a nese-site, poesiou, abil, chansoniou, dolmenou ha menhirou* (!), *kandidatur, konklui, elokant, retardi*, h. a... Hag ar Barz-Difazier, ouspenn, e teu gantañ maout ar faziou a bep seurt epad ma tistro pôtre-d-o-broz d'ar galleg evel ma ra eur hi d'e zislonk. Ha talvezoud a ra ar boan !

Merkom ivez, hag atao en eur vond, e heller tamall ar memez tra d'ar vrezonegerien a-vremañ, er-mêz unan bennag (ha c'hoaz n'eo ket asur din)

hag hep derhel kont euz ar re gosa a gav beh-habeh gand ar galleg. War Jakez Riou e-unan e koueze an tamall-ze hag en gouzoud mad a ree. Er *Horsedd-Digor*, ouspenn hag an Drouized a bak o fegement. Ma 'z int kablusoh eged ar re all, ma ra goap Jakez Riou ouz an urupailled-se, se a zo abalamour o broz hag o lidou a zlefe goulenn ar brezoneg ken groñs ha ma houlenne ar zoutanenn al latin. Netra gemmet abaoe, daoust ha m'o-deus strivet dibaouez epad tost hanter-kant vloaz stourmerien a bep seurt. *Gorsedd-Digor* a zigouez gwelloc'h eged biskoaz gand an amzer a zo warnom. Eun druez eo pa ne hell ket beza lennet gand ar ganerien-o-hitar a daol bommou blej e brezoneg hag int diouest-kaer da zével, en or yez, an disterra frazenn. Kitar ha broz zo memez tra. Hogen, n'eo red da zen ebed en em dreuzwiska. Eun druez eo pa ne hell ket beza lennet gand korollerien folklorel-ze ha n'ouzont ken fistilla ouz giz o dillad hag o hlipenn. Eun druez eo, war an diwez, pa ne hell ket beza c'hoariet war eul leurenn bennag. Mad. Netra gemmet evid pobl ar vrezonegerien en em leusk da veza gonezet gand ar galleg ken e teuont da gomz falloh c'hoaz eged ar Barz-Diouganer a ziougane gwir, war ar poent-se, hep gouzoud dezañ.

★★

Bez ez eus ivez, e gwiad ar pezh-c'hoari, eun neudenn hoap ouz ar ginkallerezh ma tenn diganti an darnvuia euz ar briz-skrivagnerien e brezoneg ar peb brasa euz o awen abaoe ar *Barzaz Breiz* hag en desped da hemañ : al lann alaouret, ar brug, an touriou dantelezet (e-giz ar hrampouez), ar hoefou, ar brageier-braz, an dillajou neudet, kement a draou a zo bet nahet e rakskrid *Salain* gand Tangi Malmanche a damall dezo ouspenn beza dihenchet e genvreudeur vrezonegerien diwar o gwir dachenn labour a vefe bet da gas war-raog spered hengounel Breiz eleh sevel koz-c'hoarivachou gand skoazell liviou

ar vro. Ken anavezet ha m'eo oberour Gurwan evel eun tager kriz, ne lavar tamm gaou ebed pa zivenn n'eus ouz dastumadenn Ar Merzer, « Les Bardes et Poètes nationaux de la Bretagne armoricaine » nemed eun testen euz paourentez barzoniezh ar mare, ha padal e felle dezi douga brud d'an drouiziezh nevez. Hep ranna tra muioh, lavarom n'eus deut diwarni oberenn a bouez ebed. Ha piou a zo neuze ar barz braz ganeom ma n'eo ket Botrel ! Me manan da gred, peogwir 'm-eus kanet kant gwech *La Paimpolaise* gand difronkadennou d'he heul, *La Paimpolaise* a zo bet eur zon pobleg ma 'z eus outo, e-giz kalz re all savet gand ar memez oberour. E 1923 e oe savet Festou Meur Kerne, da neuze Fest ar Rouanezed, outo skeudenn reiz, en doare botreleg penn-da-benn, euz tro-spered fals-sevenadurel an amzer-ze, ha m'o anavezan mad, me, evid beza klasket gwella ma hellan, eur hard-kantved diwezatoh, o zrei war-du paliou all. An darnvuia euz an Drouized en em gavas eno gand ar peb brasa euz ar skrivagnerien ha kanerien. Evid just, n'eus netra da damall da youl-vad an dud-se, nemed soñjal e weled al lennegezh halleg, dres e-keñver ar memez bloavezioù, o tarza dispah an Dreistwirvoudelezh, hag homañ ken tost ouz ijin-dreist ar Vretoned. Ez-tre da gomprenn kerseenn Jakez Riou pa gavas dira-zañ, goude an distro a Vro-Spagn, seurt rannvroegezh hirêzuz ha kokardenneg war eun dro, o kemmeska dihouzvez eur gristeniezh-parrez gand restachou dispis ar baganiezh a dalveze dezo da greski brud ar hentadou ha da rei sked d'o diskennidi. Kement-se a oa pell diouz huñvreou ar pôtr hag en doare da zeni lezou e ratoz.

Re-bar da Dangi Malmanche, ne hellas ket en em derri da waranta eun disterra al lorchou-ze. Hag an dinah a-berz daou euz or brasa skrivagnerien (n'eus ket kemend-all outo) a dalvez eun tamall evid mad dre ma 'z eo skler-tre ne oant ket heñvel tamm ebed an eil ouz egile. Araog pe goude beza

lennet *Gorsedd-Digor*, selaouom Tangi Malmanche o konta gorsedd Lezneven. Lavaret vefe o-deus en em glevet an daou zen da zevera ar memez goaperez. N'o-deus grêt, e gwirionez, nemed selloud ouz ar memez arvest gand ar memez lagad : « Sur l'échine rousse d'un dolmen, dans l'azur profond du ciel et de la mer, se profilèrent des messieurs moustachus et barbichus, vêtus de binocles et de robes blanches, vertes et bleues. Un héraut lança des appels aux quatre coins de l'horizon, qui d'ailleurs se gardèrent bien d'y répondre. Et la cérémonie se déroula, dans des tableaux vivants et des poses définitives d'hommes de bronze, pour le plus grand esclaffement de quelques baigneurs accourus de la station voisine de Brignogan et le complet ahurissement des indigènes surpris au cours de leurs travaux champêtres. Les femmes surtout (était-ce l'appel ancestral ?) marquaient une vive agitation. Une d'elles, qui avait vu des charlatans dans les foires, voulait à toute force montrer une dent malade au Grand Druide. D'autres, à tout hasard (on ne sait jamais), serraient bien fort la main sur la poche où l'on met les sous. Quant aux hommes, eux, ils ne riaient pas car le dolmen portait le signe de la croix. Déjà, l'autorisation du propriétaire n'avait été obtenue que de justesse... (3)

Setu aze, kea, eun tamm renta-kont fentuz ha dihaouer war eun dro, a hellfe tremen da vammenn wir ar *Horsedd-Digor*. Ar memez kerseenn 'ni eo he-deus taget an daou zen. Gellet e-neus Jakez Riou kaoud anaoudegez euz pennad Tangi Malmanche. Ma n'e-neus ket bet, petra vern ! Gorseddou an amzerze ha doareou an dud en o heñver ne oa kemm ebed etrezo euz an eil dalh d'egile.

Kredi a ra din klevoud c'hoaz or mignon Kreston o konta deom eur horsedd ma oa bet war e dro gand Youenn Drezen ha Jakez Riou. Glao a ree, spontuz. Eun drouiz en e wiskamant bourhiz, erru diwezad, a hadas e vroz hag e ginkladuriou war ar

strêd, abalamour d'eur valetenn serret fall. Mond a reas an tri gomper d'en em bosta war hent an heuliadeg. Neuze e tarzas c'hoarzedenn omerel (n'eus ger all ebed) Jakez Riou pa welas o tond an Drouiz Meur, reutet en e vrasentez, endro dezañ e golisted, an eil o hargamma a-zehou, egile a-gleiz, ken e tiskouezent rei moged d'eun eskob *in partibus celtarum*. Da glokaad kement-se, eun ezel euz ar Poellgor, pignet war ar mên, a strebotas hag a steuzias en eur bodad lann, ma chomas warnañ e vroz e-giz eun tamm lienn o sehi. Jakez Riou a c'hoarze dalhmad, ne baouez ket da deurel bommou goap. E-kreiz konta deom an taoliou-ze, Kreston ne dremene ket hep ober jestroù an Drouiz Korn-Boud o klask en aner tenna eur zon bennag deuz e venveg. Tost eo bet deom tarza o c'hoarzin ouz kleuziou Enez Vaz. Eur wech êseet deom, ha peb flemm er-mêz kont, anzavet on-eus a-unvan e oa ouz an adskeudennaduriou istorel ar horvigellusa trap evid ar henaoueien hag ar flammiged a beb ouenn. Skler an dra, forz penaoz, farsadenn lirin ar *Horsedd-Digor* a zo bet aozet diwar ar horsedd wir-ze, Jakez Riou o veza dalhet en e spered an ampoentou a helle maga al luadenn.

★★

Eun dra all a oa dezañ da zizoloi ; daoust d'an testou galvet dre red, pobl Vreiz ne oa ket kalz a liou outañ er *Barzaz*, oberenn eun denjentil sod a-walh gand e renk hag e-noa kempennet, divorhed a-walh, soniou kouerien evid o lakaad da zigas greun d'e vilinou avel pe zour. Setu ma kaver er *Barzaz* eun tamm barzoneg anvet *Ar Rannou* a zigaso ahanom dres d'ar gaoz a oa ganeom, n'eo ket hepken abalamour d'eun Drouiz a ra kentel ennañ, abalamour d'ar raned ne lavaran ket. Moarvad ez eus aze, diverket brao gand Kervarker, eur seurt diskon-tadenn anavezet ha kanet gand ar bobl dindan an ano *Gousperou ar Raned*. Hogen, Jakez Riou e-neus

plijet dezañ hedata spis lidou ar Horsedd gand eur hor raned godisuz pe fuloret hag a nah ober peoh, e-giz ma tamallfent d'an Drouized beza laeret o mad diwarno. N'eo ket dre zigouez kennebeud ma ra urz an Drouiz-Meur da liez lakez diouz renk d'ober d'ar raned tevel en eur foueta ar poull evel ma ranke ober ar gouerien e douveziou ar hastell evid diwall kousk an aotrou. Hag ez eus er hor-ze eun damgoun euz Aristofanez evel ma 'z eus e koriou laboused *An Ti Satanazet* ha *Nomenoe*, en anzav a ran a galon vad, nemed en em gavont aze evid sternia danvez ar c'hoariva, traken.

Ar bobl, e gwirionez, a jome er-mêz euz an drouiziez nevez hag an oll luskou breizeg kaset gand bourhizien desket pe zesketoh, re baket gand c'hoant gounid eun tamm bugadenn diwar e goust evid soñjal beza reiz en e geñver pe divenn e vad. Ar pennou-tud-se, e berr, ne oa outo nemed moneiz rouz ar skoed aour e zanvez daeluz taolet er foar gand Kervarker. Evelse, mistri Yann Gouer, an eil warlerh egile, goude bet servijet gantañ, a gendalhe da denna servij dioutañ. Ar wech-mañ, avad, ne houlennent digantañ d'an nebeuta nag e arhant nag e boan. Gwelloh c'hoaz, bez e helle kaoud berr-amzer o selloud ouz an aotrounez-se o poania stard da gemer skouer diwarnañ da vad. Ne ziuere ket e blijadur. Jakez Riou, avad, mab Pennavern, ne oa ket a-du.

\*\*\*

Petra neuze ! Ha dao oa heulia avel Gwalarn pe sterenn Walarn, nevez savet a-greiz-oll war ar mantruz a foarlah-ze ? Diazezer ar gelaouenn, Roparz Hemon, e-noa grêt e amzer soudard e Gwened gand Jakez Kerrien, trede mouskeder Miranda de Ebro, hag hemañ e-noa kalz a zoujans evitañ. Med Jakez Riou e-noa diegi mond er c'hoari gand aon da zastum adarre e ganetennou ma teufe an taol da jom krenn eur wech all c'hoaz. Ne zistrofe ket ar roue

Arzur, gand Marzin nag hebtañ, ne oa ket pouez a-walh er pennou braz o zeier jiletenn nag e lidourien an uhel-varr. Daoust hag en em lezfe kouer Lotei, den-d'e-spered e-unan, da goueza e trap e bared ? Dedennet oa, moarvad, gand o embregerez, kredi stard a ree e tougfe frouez, med peseurt hini ? Hag ouspenn, klevoud mad a ree e rankfe ober dileziou. Evid diskulia kudennou ar prosez, setu ma roas kefridi d'an Drouiz-Meur da zavel ar brezegenn-damall eneb da Walarn. Ha kement-se a dalvez deom eur boelladenn helavar a gemmesk gwaz-pe-waz arguzennou diouzremmeg, an darnvuia outo o koueza war fri an azen a brokuler. Lezom anezo eleh m'emaint. Lavaret eo, koulskoude, n'eo ket re vaill pôtrez Walarn war ar brezoneg-teod, n'o-deus darempred ebed gand ar bobl, o kavoud gwelloh engouestla Norvejianed, e vourront o trei oberennou estren euz an iskisa, a-faot moarvad da veza awenet o-unan, e reont gand eur yez diêz, mad d'ober fallgaloni d'an dud a youl-vad. Ha brezoneg eo ar yez-se ? Petra eo *Tonkadur bugale Tuireann* ? Ha *Sketla Segobrani* ? L'éclat de ses gros bras nus, a respont eur barz luch. Hogen ar bourd-mañ, m'em-eus klevet mad Kreston, a oa bet taolet er-mêz gand Jakez Riou e-unan, pôtr ha ne vanke ket d'ober al lu gand ar brezoneg doktorel. Ouspenn-ze an oll rebechou m'em-eus savet ar gont outo a oa dres ar re hrêt da skipaill ar gelaouenn nevez er bloaveziou kenta. Youenn Drezen ivez a ra goap ouz ar brezoneg houarn-gwenn a wisk aozadurioù tenn evel *Ar Bouddha hag ar Vouddhaedegz*.

\*\*\*

War an diwez, evid leunia ar pod, Jakez Riou a daol ar flemm warnañ e-unan. Ober a ra d'ar Barz-Diouganez dougen meuleudi d'e leor *Lizer an hini maro*, embannet gand Emgleo Sant Iltud e 1925. Ezel ebed euz Gwalarn, eme ar Barz ne hello

biken lakaad eul leor da zigouezoud evel hennez, « trist ha joaiuz tro ha tro, ha plijaduruz da lenn, evid ober pehini eo red kaoud deskadurez vraz, hag eur spered lugernuz, ha beza mignon d'an Awen ». Hogen, *Lizer an hini maro* ez eus outañ, a dra zur, disterra oberenn Jakez Riou, grêt war ziviz penn-dabenn, eun tamm pezh-c'hoari skrijuz ha skoueriuz eun tanfoeltr, war zanvez ar vezventi, eun destenn kant gwech ravodet. Mar plij ar leor-ze d'ar barz, setu aze pezh a ziskouez skler e zempladurez (4). Eun dro kavet gand Jakez Riou d'ober deom da houzoud ne vo *Lizer an hini maro* ebed ken hivi-ziken. En e leh e teuio, goude diazezet striz an traou, *Lan, embanner al ludu* ha danevellou *Geotenn ar Werhez*, pennrollou euz ar re-mañ o veza dija berr-dreset e Soazig ha Mordiern, an daou benc'hoarier truezuz a gaver el *Lizer*. Pegement a labour, avad, hag a vorhed hag a vretadeg gantañ e-unan ahann-di.

Da genta, ar skrivagner a zo stambouhet gand eur helennadur klasel a-bouez ma ranko kas anezi diwar e dro m'e-neus c'hoant sevel eun oberenn vreizeg, o veza ma ne ra van ebed ar helennadur-ze ouz sevenadurez prevez kouerien Vreiz-Izel. Esoh evitañ, moarvad, skriva e galleg evel m'eo èsoh d'e varzed kaozeal er yez-se. Ha goude oll, e bennadchom e Pariz, e sal-labour Kreston, e-kreiz eur vandennad arzourien dibreder ha farsuz, a vroude anezañ da boelladi war ar bommou-ijin, ar c'hoariou-lavar, an taoliou-fent hag ar gerioù a-dreuz ma 'z eo gwall-zouget ar galleg warno, hag a ya mad-tre gand tro-spered ar Barizianed, padal n'int ket aotreet gand ar brezoneg ken e tivarhont ar vrezonegerien. Jakez Riou, ar studier koz, ne hell padoud hep beza dedennet gand an doareoù godisad pe fentigella a ra berz e Monmartrez, er Harter Latin pe war havez Pariz. Diouz kement-se ivez e ranko digleñvel. Lennit galv an Drouized, Barzed hag Ovizien hag e viot a-du ganin. Rakger (pe araogenn) *Ab*

an anioù drouizieg a zo digarez d'eur vezevennuz a zibunadeg ma klasker eviti skoazell ar galleg, ar brezoneg, ar spagnoleg, al latin, an arabeg, an hebraeg ha zoken al luhaj. Hag e kendalher gand *Lab, Sab, Kab, Jab, Bab*. Se a zo lemm ha diboellkaer war eun dro, c'hoari tud-d'o-spered hag a-wechou diskibien-touet, nemed e ranker beza bet savet er seraill evid e glevoud mad. Eur berz dreist a hortoze Jakez Riou ma vije bet abadennou tavarn e brezoneg, war an diviz da dremen gand penoberenn ar barz nevez Ab-Domen : an ara a ra harakiri et tant mieux pour kiri ra. En arvar da zivarha evid mad yezoniourien dispar evel Emil Ernault a glaskas en aner, a-dreuz tachenn ar yezou keltieg penn-da-benn, talvoudegez ar « war vilo » a gaver er *Horsedd-Digor* goude beza bet silet araog e *Lizer an hini maro*. Torrom ar gaouz.

Sal-labour Kreston hag he briz-liverien beillerien-noz, darbarerien er Hohu braz, rollou mud er c'hoaridiou, krierien o faper moulet, ma ranker tamall dezo seurt c'hoariellou da lemma ar spered e diouer d'e binvidikaad, sikouret o-deus koulskoude Jakez Riou da deurel e hroum. Gwelloh c'hoaz, e-touez an arzourien-ze deut a beb leh, en em gave ar re a zavas ar henseurterez anvet ar *Seiz Breur*, fermour ar zal-labour er penn kenta. Klask a ree neuze ar *Seiz Breur* diazeza eun arz breizeg maget diwar anaoudegez rik an hengoun anez beza sujed dezañ tamm ebed, ha gouest a-walh da zougen testen, en amzer neuze, euz eun doare arz a glotfe gand ar vro ha zoken gand ar yez. « Stummet e vez ar spered dreistoll gand ar yez, a voul menoz ha buez eur bobl, a zo melezeur uhella heh ene » (5). Eun taol-esa hag a helle tremen, gwir eo, da c'hoantegez re uhel. Ma n'o-deus ket gouezet atao ar *Seiz Breur* en em zivall ouz o amzer, ma 'z eo c'hoarvezet ganto a-wechou koueza en eur varokelez hoaluz, roet o-deus, d'an nebeuta, d'ar zavadurez relijiel ha stadel koulz ha d'an arzou bian eul lusk ma

zantom hirio c'hoaz ar vadelez outañ. Pez e fell din ober da glevoud, o zaol-esa war zanvez an arz a denn tre da hini Jakez Riou war zanvez al lennegezh. Ha n'eo ket moarvad dre zigouez ma 'z eo skeudennet embannadur kenta ar *Horsedd-Digor* gand engravaduriou-prenn Mikael Mohrt, oberour da zond *La Prison Maritime*, war eur stumm a zigas soñj, en desped d'eur skeul disheñvel, euz Jorj Robin, unan euz ar *Seiz Breur*, a oa o paouez mervel goude Janed Malivel, atizerez an emzav.

Engravaduriou-prenn ar *Horsedd-Digor*, speredeg, goapaüz, fresk ha yaouank penn-da-benn, a glot euz ar gwella gand eur skrid divoaz ha dichek, « savet gand Jakez Riou hep goulenn aotre digand den », eur skrid euz ar re ma ne gaver ket a-walh outo, siwaz, en or lennegezh. Tangi Malmanche e-neus skrivet ez eus e peb Breizad eun tamm beleg, eun tamm mestr-skol hag eun tamm archer. Hag e gwirionez, an disterra tudigou euz an emzavioù breizeg, dreistoll ar re a skriv, a zo gwall-zouget da brezeg war an ton braz. Disonjal a reont ez eus ouz ar Breizad-pobl eur fenter a-ouenn. Hag ar fent-ze e-neus sikouret anezañ da houzañv e reuzidigez muioh eged mene-gou helavar eun amzer dremenet re bell dioutañ evid servij dezañ tamm pe damm. Trugarez, eta, da bôtr Lotei e-neus digaset eur pennad flemmgan ken kaer d'eul lennegezh vrezonég dedennet a-walh gand danevell-veur an Istor, fals pe wir, ha gand hirnez vourhizel eun urz dalher d'e draou.

★★

Eun dispar a zellid eo beza trohet eur ouenn re goz a bompadou hag a neuziou seven. Jakez Riou an dieuber. Eñ e-unan, avad, e felle dezañ dieubi da genta. Ha setu perag n'eus ket gwelloc'h eged ar *Horsedd-Digor* da zigeri dor e oberou. N'eus an den-ze netra d'ober gand an noblans o vond da fall na gand ar vourhiziezh en he bleud. Dilennet e-neus

ar munuta euz ar bobl, ma 'z eo deut dioutañ e-unan ha ma tougo testeni evitañ hiviziken. N'eus netra d'ober gand an hirneziou fals-istorel, ar wirionez pemdezieg ez eus enni muioh a bouez. Ar *Horsedd-Digor* a zo ar brouilled a daolo dioutañ peziad peurhrêt an *Nomenoe* (6), flemmgan ha danevell-veur war eun dro, danevell bobleg avad, ha ne zell tamm ebed ouz ar Grenn-Amzer nag an aotrouniez. Pell emer diouz ar *Barzaz Breiz*, a dra zur, tostigitre ouz an dud hag an traou a-viskoaz. An oll Vretoned o fougeal en deiz hirio da glask diskoulma kudennou Breiz, ar re goz hag ar re nevez, a zlefe anzav da zifraoster Jakez Riou, didoueller ma 'z eo, ar barz beteg an douar n'eus ket bet aon d'embann e oa noaz ar roue ha ne dalvez aliez plu pavon an Istor nemed da dreuzwiska kegined.

Per Jakez HELIAS.

- (1) E koun Jakez Riou, Gwalarn, genver-c'houevrer 1938.
- (2) Daou bez-c'hoari gand Taldir-Jaffrennou.
- (3) *La vie de Salaün qu'ils nommèrent le Fou* (Librairie Académique Perrin). Préface.
- (4) Nemed n'e-nefe ket lennet anezañ, peogwir e lavar eo joaiuz (!)
- (5) James Bouillé, e Kornog, 1929.
- (6) Ar *Horsedd-Digor* a zo e-keñver an *Nomenoe* kement ha *Lizer an hini maro e-keñver Geotenn ar Werhez*.

# GORSEDD - DIGOR


**EUN ARVEST**

**GAND**

**Jakez RIOU**

Bet moulet evid ar wech kenta gand an Oberour  
e-unan e 1928.

Peb gwir miret striz gand an Itron Riou hag an  
Aotrou Morht.



*Breiz, dou-ar ar zent*

*koz, dou-ar ar var-zed...*

setu amañ gorsedd-digor, pez-  
c'hoari dic'hoarz, belimuz ha  
dibaeron, en eun arvest ; dia-  
zezet war ar wirionez — darn  
a gredo war ar gaou : savet  
gand jakez riou, heb goulenn  
aotre digand den ; skeuden-  
naouet gand eur hrennard  
a bevarzeg vloaz, mikael  
mohrt ; kinniget heb doujañs  
d'an diskibien, koz ha yaouank,  
a bigno war daol-vên al  
lid, er gorsedd-digor a zeu.

### AR C'HOARIERIEN

AN DROUIZ-MEUR  
AN DROUIZ-KUZULIER  
DROUIZED  
AR BARZ-DIOUGANER  
AR BARZ-DOUGER  
AR BARZ-KORNER  
BARZED  
DISKIBIEN  
EUN OVAD  
AN DIFAZIER  
YANN  
JAKEZ  
SOAZ  
EUN DIVROAD  
EUR BINIU  
EUR VOMBARD  
RANED  
AR HLEZE  
AN ENGROEZ



## GORSEDD-DIGOR

Eun dervenn goz. Ar skourrou a zisheolio leurren ar c'hoarileh. Daou vicherour o peurgempenn eun daol-vên hag o tresa eur skabel, a-dreñv.

Pelloh, parkeier, taoliou-mên ha mein-hir, du-mañ du-hont. Staget ouz an daol-vên, eur skritell skrivet warni :

ATANSION A LA PINTUR

Amzer gaer.

KOR AR RANED, en tu kleiz.

Râââ... râââ... râââ... râââ... râââ...

JAKEZ

Hastom afo, Yann. Pelloh e teuint.

YANN

Echu eo, Jakez. Ar wech kenta eo din pleustri gand ar seurt labour. Barreg om. Daou pe dri daolig c'hoaz ; eur boentenn pe ziou, hag ema labour peurlipet ha kempenn.

JAKEZ

Eun devez kaer o-devo evid o fardon.

KOR AR RANED

Râââ... râââ... râââ...

YANN

Eun devez kaer-meurbed. An heol a zo tomm ;  
re domm zoken evid an dud a labour gand o horv.  
Disheoliet e vezint gand deliou ar wezenn-mañ.  
Gouzoud a reont peleh e vez kavet distan.

*(Ehan a reont labourad ; selloud a reont ouz an  
daol-vên).*

YANN

Kredi a ra din eo echu.

JAKEZ

Livet mad eo... Tenna 'ra da vein rouz.

YANN

Da vein Lokorn zoken.

JAKEZ

Piou eta a zeuio amañ bremaig ?

YANN

Drouized em-eus lavaret dit.

JAKEZ

Drouized ?

YANN

Ya ! drouized. N'ouzon ket hirroh.

JAKEZ

Klevet em-eus e teuint war lost o roched. Ha  
gwir eo ?

YANN

War o sae wenn a vefe gwirroh.

JAKEZ

E-giz beleien, neuze ?

YANN

Beleien int moarvad.

JAKEZ

Ha peseurt ano a reer ouz ar bern paper-mañ ?

YANN

Eun dolmen.

JAKEZ

Eun dolmen ?

YANN

Ya ! eun dolmen.

JAKEZ

Gweloud a ran stumm eun daol ; hogen mein  
ne welan ket.

EUR VAOUZ a dremen.

Oh ober eun diskuiz, gwazed ?

YANN

Ya, ya, Soaz. Ha c'hwi a zo o vond d'ar bourk ?

SOAZ

Ya ! d'ar bourk emañ o vond. Hogen, klevet em-eus a-hed an hent, e vezo amañ, en abardaez-mañ, eur gouel kaer-meurbed ?

JAKEZ

Gouel braz a vezo bremaig.

SOAZ

Ha peseurt gouel a vezo ?

YANN

Ha peseurt gouel ?...

JAKEZ

Ha peseurt gouel ?... (*Nebet e chomont o-daou, Yann ha Jakez*).

YANN

Lavaret a zo bet din ; hogen, dizonjet am-eus... Eur gouel santel pe eun dra bennag evel-se... Drouizet... Barzed... ov... ovizien, diskibien, ha petra c'hoaz ?...

SOAZ

Ovi... zien ?...

YANN

Red eo kaoud deskadurez vraz evid gouzoud petra eo ar ger ovizien.

SOAZ

O ! neuze, me...

YANN

Goulenn a rin... Eun istor euz an amzer goz, goz... (*Eun taol biniou war an tu dehou, pell*). Selaouit 'ta. Eun taol biniou !

JAKEZ

Emaint o tond !

YANN, *da Soaz*

'Benn an noz, goude koan, ez aim d'ho ti da zisplega deoh an istor-ze, evid beb a vanne gwin war ho koust. Ma n'eus ket re a brez warnoh, e hellfeh dalea amañ eur pennadig...

JAKEZ

Talvezoud a ra ar boan gweloud.

SOAZ

Neuze e choman... Koulskoude em-boa c'hoant beza abred er gêr.

TUD, *o hopal, pell*.

Hep ! hep !

JAKEZ

Sell ! emaint degouezet er horn-tro.

AN DUD

Echu eo ?

YANN, *a-bouez-penn*.

Deuit ! echu eo.

JAKEZ, a-bouez-penn.

Echu eo.

KOR AR RANED

Râââ... râââ... râââ... (Biniou ha bombard war an ton braz. Yann ha Jakez a zamm o binviou hag a ya kuit).

SOAZ

Ne chomit ket ?



YANN HA JAKEZ

O ! nann !

JAKEZ, da Yann en eur c'hoarzin.

An drouized, n'o-deus ket soñjet ez eus raned e-leiz an toull-lagenn, aze.

SOAZ, chomet heh-unan.

Gwerhez Vari ! eur banniel a zo ganto ! Eur gouel santel eo ! (Penndaoulina a ra. Son ar biniou a dosta... Hag e teu war ar c'hoarileh : banniel ar Gorsedd, biniou ha bombard ar Gorsedd, izili ar Gorsedd : An Drouiz Meur, hir, moan, koz, treud e-giz eun dreujenn-lann, baro gwenn beteg e vegel, eur zae wenn beteg hanter e gov-kar, eur falz aour en e zorn, eur gurunenn uhelvarr war e benn moal ; drouized war o zae wenn, heb kurunenn, heb falz aour ; barzed war o zae hlaz ; eun ovad war e zae hlaz-beler ; diskibien, krennarded pe dreist an oad-gour, e kiz-kêr, eun tok melon war benn pephini, ha danvez ovizien, barzed, drouized ha Drouized Veur zoken enno oll. Warlerh tre, ar werin : gwazed, krennarded, merhed a beb oad hag a beb stad. Ar peurvuia euz ar wazed hag euz ar merhed — ha zoken ar merhed bleo trohet (1) — a zoug ar gwiskamant broadel. En eur horn ha war weled, an difazier, gwisket evel eur bourhiz. An Drouiz Meur a bign war an daol-vên. En tu kleiz d'an daol-vên, ar barz-douger, e hanter kleze war eur pallennig voulouz ; en tu dehou, ar barz-korner, pe vice-versa : an tu ne ra forz ebed).

SOAZ

O ! nag a dud kran, va Doue !

(An Drouiz Meur a bign war an daol-vên. Tevel a ra ar biniou).

EUR BARZ, o weloud ar skritell chomet a-ispill ouz an daol-vên.

Ah ! M... !

Dilammad a ra da zistaga ar skritell. An drouized en em vod endro d'an daol-vên ; a-dreñv an

(1) Ken iskiz e oa ar merhed bleo trohet e 1928 hag ar baotred vleo hir e 1968.



*drouized, ar varzed ; a-dreñv ar varzed, an ovad hag an diskibien. Tro-war-dro hag en diavéz, ar werin. Eun den a zoug war gorre e chupenn glazig eur vuze-tenn hanter-serret, hag e weler enni eur gasketenn.*

AN DROUIZ MEUR

Ar Peoh a zo ?

DROUIZED, BARZED, AN OVAD

Ar Peoh a zo.

KOR AR RANED

Râââ... râââ...

AN DROUIZ MEUR

Ar Peoh a zo ?

DROUIZED, BARZED, AN OVAD

Ar Peoh a zo.

KOR AR RANED

Râââ... râââ... râââ...

AN DROUIZ MEUR

Ar Peoh a zo ?

DROUIZED, BARZED, AN OVAD

Ar Peoh a zo.

KOR AR RANED

Râââ... râââ... râââ... râââ...

AN DROUIZ MEUR, *d'eun Drouiz*

Kasit eun diskibl da foueta an dour evid d'ar raned ober peoh. (*An diskibl kemennet dezañ a ya. D'ar barz-korner*) : Sonit, barz leal, sonit e korn Arzur, ma klevo ar re veo hag ar re varo ; ha sonit teir gwech : tri a zo eun niver bardig.



EUR HOUER

Ha tri ha tri e ya ar varzed da zimezi ?

EUN DISKIBL

Dalh ganit da zotoniou.

*Ar barz-korner a zon teir gwech.*

AN DROUIZ MEUR

Ar Gorsedd a zo digor. Bremañ emaoñ o vond d'ober an apel. Da genta, ar re a zo eat d'an Anaon. Al listenn a zo astennet, siwaz ! rag an Ankou en-deus skoet aliez abaoe ar Gorsedd diweza.

(*D'an Drouiz*) : Kasit eun diskibl all da foueta an dour : ar raned a zo eun torr-penn.

Listenn an Drouized.

Ab-Er.

AN DROUIZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Iit.

AN DROUIZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Erzdoue.

AN DROUIZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Erwrac'h.

AN DROUIZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Delkader.

AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Ovo.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Raham.

## AN DROUIZED

Desedet.

KOR AR RANED, *war wasaad.*

Râââ... râââ... râââ... râââ... râââ... râââ...

AN DROUIZ MEUR, *d'an Drouiz.*Kasit eun Ovad da zikour an diskibien, unan hag  
ema gantañ nerz e vugale.AN DROUIZ-KUZULIER, *goustadig.*

N'eus nemed unan, Drouiz Meur.

## AN DROUIZ MEUR

Kasit anezañ.

*An ovad koz a ya gand eur mell penn-baz.*AN OVAD APOTIKER, *en eur vond.*

Asid sulfurik a vefe gwelloc'h.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Oukir.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Iorix.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Gwennoll.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AB-GWENNOLL

Hopala ! amañ emañ prezant.

## AN DROUIZ MEUR

Abaoe...

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

... abaoe ken nebeud a amzer, nag a varoiou,  
siwaz !...

## EUN DISKIBL

Dougen baro hir pe chik touz... petra ra se ?

## AN DROUIZ MEUR

Ya, hir eo listenn ar re varo am-eus anvet, ha ne ran nemed komañs !

Ab-Elard.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-On.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Oubal.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Atido.

## AN DROUIZED

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Alamour.

## AN DROUIZED

Desedet.

EUR VAQUEZ, a vro Leon.

O ! alato !

## AN DROUIZ MEUR

Doue a bardono d'an Anaon !

## AN DROUIZED

Amen.

## AN DROUIZ MEUR

Ha bremañ listenn ar varzed. Hogen, mond a rafom diod gand ar raned mar n'om ket eat c'hoaz. Ra yelo daou varz volonter d'al lagenn. (*Daou varz en em ginnig*). Kemerit bizier hir ha teo : muioh a raned a vezo friket gand ar memez taol. Ha roit koad dezo hardi !



Ab-Absurdo.

AR VARZED  
 Vixit.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Cisse.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Homine.  
 AR VARZED  
 Vixit.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Sinthe.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Adir.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Avunculus.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Denago.

AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Imelech.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Salon.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Iron.  
 AR VARZED  
 Desedet.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Ab-Imé.  
 AR VARZED  
 N'eus kelou ebed outañ.  
 AN DROUIZ MEUR  
 Lakaom anezañ dispartiet.  
 Ab-Réviation.  
 AR VARZED  
 Desedet.

Ab-Latif. AN DROUIZ MEUR

Desedet.

AR VARZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Rupt.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Oulez.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Ordage.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Ydos.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Dula.

AR VARZED

Desedet.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Derian.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Dââh.

Desedet.

AR VARZED

AN DROUIZ MEUR

Ab-Olishable.

Desedet.

AR VARZED

AN DIFAZIER, *goustad d'an Drouiz Meur.*

Abrégez.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Régez.

Desedet.

AR VARZED

AN DIFAZIER

Abrégez... abrégez, nom d'un chien !

## AR RANED

Râââ... râââ... râââ... râââ... râââ... râââ...

## AN DROUIZ MEUR

Ar raned... ar gisti raned flêr a zo eun ampoezon. Ra yelo eun Drouiz. Marteze e vezo muioc'h a resped evitañ. Ha ra vezint friket beteg an hini diweza. (*Eun drouiz a ya ; barzed a ya gantañ...*) Ha bremañ tro an ovizien varo.

Ab-Solument...

Ovad ebed ne respont evid Ab-Solument ?...

## AN DROUIZ-KUZULIER

N'eus nemed eun ovad hag eo eat d'ar poull-dour.

## AN DROUIZ MEUR

Pa n'eus nikun da respont evito !... An diskibien eat d'an Anaon.

Kab-Anon.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

## KOR AR RANED

Râââââ !

## AN DROUIZ MEUR

Lab-Or.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Kab-Allero.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Kab-Yl.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Sab-Aoth.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

## AN DROUIZ MEUR

Cab-Iche.

## AN DISKIBIEN

Desedet.

AN DIFAZIER, *goustad d'an Drouiz Meur.*

Abrégé.

## AN DROUIZ MEUR

Re hir eo listenn ar re varo : gwelloc'h e kavan ober apel ar re veo. An Drouized :

Ab-Gwennoll.

AB-GWENNOLL

Setu.

AN DROUIZ MEUR

Ab-As.

AN DROUIZED

N'eo ket deut.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Attis... Den ne respont ?... Ha ! gast ! me an hini eo. Prezant !

KOR AR RANED

Râââ... rââââââ...

AN DROUIZ MEUR

Ar raned !... ar raned !... It, drouiz yaouank, ha cheñchit penn d'ar poull.

AN DROUIZ, *en eur vond.*

Ar raned a gomañs ammerdi ahanom.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Rasdhomme.

AB-RASDHOMME, *el lagenn, droug ennañ.*

Amañ emaon.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Hermine.

AB-HERMINE

Prezant.

EUR BARZ, *d'eun diskibl.*

Hennez a zo bet marichal de loji 'pad e amzer zervij.

AN DROUIZ MEUR, *o klask eul listenn all.*

N'eus ken ?

EUN DROUIZ

Aze 'maint toud.

AN DROUIZ MEUR

N'eo ket hir listenn ar re veo e-keñver hini ar re varo. Ar varzed :

Ab-Solvenn.

AB-SOLVENN, *euz al lagenn.*

Amañ.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Ouezpenn !...

AR VARZED, *a-bouez-penn.*

Ab-Ouezpenn.

AB-OUEZPENN, *euz al lagenn.*

Petra zo ? Ne glever seurd ebed gand ar raned-mañ.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Iratua.

AR VARZED

Libera...

AB-IRATUA, *droug ennañ.*

Prezant, mil kurun !... Abred a-walh e vezo kana  
al libera...

AN DROUIZ MEUR

Ab-Enori.

AB-ENORI

Setu.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Urbe.

AR VARZED

Eat eo endro d'ar gear.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Raxas.

AR VARZED

O foueta ar raned.

AN DROUIZ MEUR

Piou n'eo ket bet anvet ?

EUR BARZ

Me !

AN DROUIZ MEUR

Hoh ano ?

AR BARZ

Ab-Rakradabran.

KOR AR RANED

Rââââââââââ...

AN DROUIZ MEUR

An ovi...

AN DIFAZIER

An ovad...

AN DROUIZ MEUR

Ab-Ominable.

AN DIFAZIER

Er poull.

AN DROUIZ MEUR

N'eus nemed unan ?

AN DROUIZ-KUZULIER

Ar re all a zo marvet e-pad ar bloaz !

## AN DROUIZ MEUR

Poent oa d'ar Gorsedd-Digor dond. Ha ma vije degouezet da hemañ mervel ?...

An Diskibien :

Kab-Oche.

## EUN DISKIBL

Gand ar raned.

## EUN DROUIZ

Hennez a dlefe kemer eun ano patriotikoh.

## AN DROUIZ MEUR

Sab-Renn.

## SAB-RENN

Prezant.

## AN DROUIZ MEUR

Gab-Ier.

## GAB-IER

Prezant.

## AN DROUIZ MEUR

Lab-Arum.

## LAB-ARUM

Prezant.

## AN DROUIZ MEUR

Lab-As.

## EUN DISKIBL

Du-ze ema.

## AN DROUIZ MEUR

Roit din eur gador : skuiz on. Kab-Riole. (Azeza ra).

## KAB-RIOLE

Setu.

## AN DROUIZ MEUR

Pab-Aour.

## PAB-AOUR

Setu.

## AN DROUIZ MEUR

Bab-Ylon.

## BAB-YLON

Setu.

## AN DROUIZ MEUR

Lab-Arbe.

## LAB-ARBE

Setu.

## AN DROUIZ MEUR

Jab-Adao.

## EUN DISKIBL

El lagenn.

## KOR AR RANED

Rââââââââââ...

## AN DROUIZ MEUR

Çab-Arde.

## AN DROUIZ MEUR

Rââââââ... râââââââââââ...

## EUN DISKIBL

El lagenn.

AN DROUIZ MEUR, *herr* :

Ar raned ! ar raned !...

ÇAB-ARDE, *o tond euz al lagenn* :

Drouiz Meur, ne heller ket dond a-benn euz ar raned. Kounnaret int.

## KOR AR RANED

Râââ... rââââ... râââââââââââ...

AN DROUIZ MEUR, *kounnaret ivez* :

Grit dezo ober peoh, pe na lezit ket unan beo ; klevet az-peus, Çab-Arde ?

ÇAB-ARDE, *o vond endro* :

Ya ! Drouiz Meur.

AN OVAD, *o tond endro* :Drouiz Meur, ovad sentuz on, nemed ar raned ne jomont ket dindan ar vaz, ha skuiz-maro om. (*An Drouized a zell ouz an ovad gand sellou kazuz*).

## AN DROUIZ MEUR

Ab-Ominable, it d'al lagenn endro. (*An ovad a zent*).AB-RASDHOMME, *o tistrei euz al lagenn*

Nul om.

## AN DROUIZ MEUR

N'o-deus ket respetet zoken ho sae wenn ? Ma ! pa ne dav ket ar raned... ne dalvez ket ar boan chom da foueta an dour ! Livirit dezo dond endro.



## OLL

Hep ! hep !! deuit endro !

## AN DROUIZ MEUR

N'eus listenn ebed ken ? Me a gave din e oa muih a ziskibien veo... Ha c'hoaz ma kendalhint oll gand o vokasion. (*Skourjezerien an dour a zo dizroet d'al lid.*) Lavarom bremañ eun *De Profundis* kaloneg evid an Drouized, evid ar varzed, evid an ovizien, evid an diskibien marvet pe da vervel er bloaz-mañ.

OLL, o santoud a-uz dezo askell an Ankou.

Brrr !...

SOAZ

Gwerhez Vari ! ar re-ze a rank beza beleien. (An oll a denn o zok nemed eur houer).

EUR BARZ, d'ar houer.

Tenn da dok 'ta. (Anavezoud a ra ar houer.)  
Tiens, c'est toi ? Ça gaze ?

AR HOUER

Mad-tre, ha c'hwi ?

AR BARZ

Comme tu vois. Ça fait longtemps qu'on ne s'est pas vu, hein ? Depuis les attaques de Champagne...

AR HOUER

Ya. Peseurt micher a rit bremañ ?

AR BARZ

Toujours le même. Pourquoi ?

AR HOUER

Netra. Ouz gweloud... (Ar Barz a dro kein).

AR BARZ

Lavarom ivez eun *De Profundis*...

(Eur pennad.)

AN DROUIZ MEUR

Ha bremañ, barz-korner, sonit. (Ar Barz-korner a zon.) Sonit teir gwech. (Ar barz-korner a zon diou wech all). Ha bremañ, va breudeur ger, ar Gorsedd-Digor particular a zo digor braz. Barz Diouganer, pignit war an dolmen. (Ar barz diouganer a bign war an daol-vên.)

KOR AR RANED

Râââââ...

AN DROUIZ-DIOUGANER

Hag ar raned, Drouiz Meur ?

KOR AR RANED

Râââ...

AN DROUIZ MEUR

Ar raned a zelaouo evel an dud.

KOR AR RANED, *krenn*.

Râ !

AR BARZ-DIOUGANER, o lenn.

Itronezed,

Dimezelled,

Aotronez,

Kenvroiz ker,

Diou pe deier gomz seulamant.

Ar horn-boud en-eus boudet. Boudet en-eus evid gervel ar Vretoned d'ar Gorsedd Santel. Klevet eo bet e vouez en Argoad hag en Armor ; hag euz peb kanton, euz pep parrezig, euz peb kear, euz ar meneziou, euz an traoniennou, a-dost hag a-bell, war droad ha war vilo, dre dommder ha poucher, dre duchennou stard ha diskennou dañjeruz, dre an hentchou ledan hag ar riboulou striz ; an oll Vretoned, braz ha bihan, yaouank ha koz, paotred gand o dousig koant, merhed gand o muia-karet, eur bod-brug war boulouzenn an tok, ha war berlez ar bruched eur boked-lann alaouret, en eur selaou kana eostiged ar garantez ; ar re gamm, ar re goveg, ar re dreud, ar re a zoug bragez hag ar re a zoug broz, a zo deredet, a vandennadou, d'ar Gorsedd-Digor, gand joa. (*Stlakadeg daouarn ; ar barz-diouganer a gendalh, imor ennañ.*) Hag on tadou-koz, o klevoud rodou ar gweturiou o strakal war vein an hentchou, on tadou koz, a lavaran deoh, o-deus goulennet an eil digand egile : Hag a-nevez war horre ? Ha gwelet o-deus, just neuze, en o bez teñval, luhedenn dir kleze Arzur, gwisket gantañ e armur lugernuz, ha klevet klemgan dudiuz telenn Varzin, deuet d'o dihuna. O-daou o-deus yudet dezo : War-Zao !

Hag on tadou-koz, va breuder ger, o-deus kuiteat o bez evid peder eur warn-ugent, hag a zo dihaloupet dre ar hammoulennou sioul, war-lerh ar barz brudet hag ar roue gloriuz, bet kousket pell amzer ; ha dihunet evid savetei ahanom. Aze emaint endro deom,

dirazom hag a-dreñv ; ha ma ne glevom ket anezo o strakal o daouarn eo abalamour emaint e rouantelez an Anaon.



A ! hag a-nevez war horre ? va breuder ger.

Abafet e choman abaoe eun abadenn. Eun darvoud epouvantabl a zo tost, hag ar bobl a-bez, den ne ra seurt evid ampech ar maleur-ze da goueza abik war he fenn. Selaou a ra sotoniou abostoled maboul a zired a-buill, a-bell, da abuzi anezi gand abuzetez, da vouzara anezi, a-berz an diaoul, gand eur brezoneg abominabl. Sklear eo ho tever breton, sklearroh eged sklerijenn an deiz pa vez an deiz ar sklearra : labourad stard a zo red. Setu perag en em gavom reuniset hirio war al lannenn vraz, dindan ar wezenn-dero goz.

Lavaret eo bet deoh, meur a wech, eo ar Brezoneg hag ar Feiz, breur ha c'hoar e Breiz. Ar Feiz ne varvo ket ; he breur ne raio ket kennebeud. Hogen,

pell zo e vije bet riñset paneved ar varzed — toud an dud a oar an dra-ze. Ha barzed a zo bet ha barzed a vezo keit ha ma tiwano gwez-dero en or hoajou, brug war or menezioù, brulu er waremm, lann alaouret el lanenn, laboused er harz, Bretoned e Breiz-Izel ha mor braz endro dezi. Ne varvo ket ar brezoneg. Mez, avañset kaer d'ar brezoneg chom beo, ha beva kantvejou, evel ar sedrez hag an olived, ma vez mahagnet, tennet outañ e vouedenn, dizeriet war e dreid, treuteat evel an Ankou, hag eur spont da weloud ? Ar hlañvour kondaonet d'ar maro eo koulz dezañ mervel. Tristoh, eged mervel, euzusoh, mezusoh, spontusoh, glaharusoh, strafufululusoh doare, va breudeur ger !... Evid dond a-benn euz relijion ar baganed, ar zent, — tud fin ma zo bet — a gemeras an templou, hag ar bobl a gontinuas da adori an Aotrou Doue el leah ma veze adoret an diaoul. Evid beza sklearroh, kemerom eur barabolenn : Ar brezoneg a vezo... a zo eur wezenn-dero, skourret mad hirio ha diskourret warhoaz vintin. Aze ema sklear ha freaz e diou pe deier gomz. Hogen, goude beza bet diskourret, eur ouenn all a vezo grefet war va gwenezenn, hag e-leah dougen per...

EUR HOUER

Per ?... en eur wezenn-dero... ?

EUR BARZ

Ya... Des Paires.

AR BARZ-DIOUGANER

... E tougo, va breudeur ger... e tougo... ar ouenn grefet warni. War ar brezoneg, va breudeur ger, e vezo grefet eur brezoneg all, eur brezoneg estrañjour, va breuder ger, eur... brr !... paneved resped deoh !...

Ha piou a zo o vond d'ober an operasion-ze da wezenn va farabolenn.

O ! c'hwi hag a zo deut de chilaou ahanon, klevet ho-peus kaoz marteze ouz eun avel hag a ra muioh a dor 'vid a vad : an avel gwalarn.

OLL

Hou ! hou d'an avel !

AR BARZ-DIOUGANER

Ya, eur vandenn baotred yaouank, — tud a galite paneved-se — o-deus kemeret da dad-paeron ar gwasa avel a c'hwez en Armor. Dre-ze e verkont mad-tre e fell dezo ober foeltr ha nompaz labour profitabl. O fallentez a zo ken don hag an oabl, hag an distruj a rint a vezo ker braz hag ar mor. N'eo ket savetei ar brezoneg eo a rint, nemed kas anezañ da netra. Eul langach ker brao, ker respetet gand an oll, karet kemend gand an douristed, chomet ker yah beteg-henn dre brizioù ha konkourioù anuel ; eul langach bet kaozet gand ar Goloaied, — an oll a oar petra zinifi Toulouse, kear ar gwadigennou brudet, — eul langach bet kaozet pelloh gand... Adam marteze ha gand Eva e bried... Ha piou, va breudeur ger, a zo da vond d'ober ar revulsion-ze ? Kredi a ra din n'em-eus ket lavaret deoh c'hoaz. Ne lavarinn ano den ebed evid nompaz kaoz trouz. Bretoned int, va breudeur ger, Bretoned eat da Barizianed ha Parizianed deuet da Vretoned ; eur vandenn baotred yaouank milliget ha n'eus ket eur varodenn war stal o mihi, ha n'eo ket hirroh o brezoneg eged penn o fri, pa n'ouzont ket an diferañs a zo etre « per » ha « Per » ha « mez » ha « mez ». Morse ne gaozeont brezoneg etrezo ha dieaz e vefe dezo — eun tamm galleg plad ne lavaran ket ; ha morse ne dougont ar gwiskamant breton na chupenn brodet o hanton. Ober a reont goap ouz bragou braz on tadou, ouz brug or menezioù, ouz al lann alaouret, ouz ar balan melen, ouz ar Pempolaise, hag ouz kemend tra santel a zo e Breiz-Izel... Padal, ni, ar varzed, ni on-eus great on fosubl

evid skigna ar brezoneg hag ober dezañ enor. Goulennet on-eus, dre vuzur a neseseite, e vezo desket d'ar bugaligou, kerkent eat en o zri miz, lavaroud ta... ta... e-leah pa... pa... D'ar foariou ez om, d'ar pardonioù ivez, ha da gemend plas e vez cheu, eur penn-baz en on dorn, eun tok peizant war on penn, teier cheletenn war or hein ; ha war or morzedou eur bragou mezer groz, ha war or hov-gar, bodreou botonou-stên. (*Stlakadeg daouarn*).

OLL

Gwir eo, gwir eo.

KOR AR RANED

Râââââââ...

*Hag ar raned a zelaou adarre.*

AR BARZ-DIOUGANER

Ni a zo Bretoned pur. Ha, va breudeur ger, ar baotred-se, paotred GWALARN ! A ! O ! dizoñjet em-eus... Ober a reont goap ouz an ano a varz !... Soñjit !... pa n'ouzont ket an diferañs a zo etre... Med an dra-mañ a zo bet lavaret. Pa n'ouzont ket goulenn eun tamm bara en eur brezoneg sklear. Rag piou a oar petra eo ar zotonioù a lakont war marhad al leoriou ? Prenet em-eus unan euz al leoriou-ze ; n'em-eus ket bet kouraj a-walh evid lenn anezañ penn-da-benn ; d'an tan eo bet chetet goude ar henta pajenn. Petra zinifi TONKADUR BUGALE... ha me oar-me bugale piou ? Pe signifision en-eus ANHUN ? BIMBOCHET a dlefe beza eur romant diwar-benn ar brezel, padal !... Hag AVEL-STERENN ? Peseurt avel eo hennez, hag euz peseurt tu e teu ? Euz tu ar sterenn ? Siwaz dezo ! N'ouzont ket n'eus nemed pevar du : an tu kleiz, an tu dehou, an tu a-dreñv hag an tu a-raog, eun dra elemañter koulskoude !... Lavaret e vez ivez an tu gwir, an tu eneb ; ar re-

mañ n'int ket tuiou veritabl. Ne gaozeont morse euz Doue en o leoriou. Ne draduzont nemed leoriou pagan, evel ar BERSED ha PROMETHEE ENCHAINE, diou drajedienn goz, savet gand Schylus, ar barz persan brudet. Ma n'eo ket eun druez chom da c'hoari gand traou ken didalvez !... Ne glever ano, en o oberennou, nemed euz Zeus koz, an doue faoz...

EUN DISKIBL

Zeus ?...

EUR BARZ

Ya ! eun doue euz ar mitoloji : Pluton e latin.

AR BARZ-DIOUGANER

Klevet em-eus e trofont FOST... Adarre Satan gand e gerniel hag e lost ! Skriva reont diwar-benn peb tra. N'eo ket gand deskadurez, nemed evid stlapa poucher e daoulagad an dud. Euz Breiz-Izel e lam-mont d'ar Hanada pe d'ar Japon da gavoud Tagor Rab... Rabi... raja, ar barz boudinist ; ha me zo sur n'int ket bet memez e Ker-Ahez !... Goude e reont eun exkursion er Hatalogn evid ober rekor ; bremañ e skrivont en esperanto evid ober epat. 'Benn ar fin e veskfont asamblez an esperanto hag o brezoneg personel, hag e lavarfont : Setu ar brezoneg veritabl.

OLL

Hou ! hou !

AR BARZ-DIOUGANER

Ober a reont poezioù evid c'hoari o barzed vihan. Ne dalvezont ket eur zell zoken ; koulz eo lenn latin. Eur boezienn vihan em-eus kavet koulskoude chik-tre ha sklear, e pehini a zo kaoz ouz trouz pevar mil taboulin.

Na pegen pell ema ar poeziou-ze euz poeziou ha barzazed presiuz or Barzed !...

Ar MABINOGION, troet euz an iwerzoneg, a vije bet important ha kaer-meurbed, ma ne vijent ket bet skrivet en eur brezoneg dieaz-kenañ. An troer a zo yaouank c'hoaz, ha n'eus ket gouezet an tu d'en em zilivri ouz skouer fall ar SKETLA SEGOBRANI. Mez deski a raio e vicher.

#### EUR BARZ

Sketla Segobrani ?...

EUR BARZ *all, en eur lucha.*

L'éclat de ses gros bras nus !...

#### AR BARZ-DIOUGANER

Kaer o-do ober, ne vezo hini ebed abil a-walh evid sevel chañsoniou eveldom-ni, ha lakaad eul leor da zegouezoud evel « LIZER AN HINI MARO », trist ha joaiuz tro ha tro, ha plijaduruz da lenn, evid ober pehini eo red kaoud deskadurez vraz hag eur spered lugernuz, ha beza mignon d'an Awen.

Bremañ e klaskont ober an azen ganeom en eur institui ar Symbole, hag eur skol vrezoneg dre lizer.

#### EUR BARZ

An dra-ze a zo kaoud kulo !

#### AR BARZ-DIOUGANER

Hogen, hebdale e vezim veñjet. Eur paotr yaouank a zo o kompozi eur gomeidienn gapital, anvet GORSEDD-DIGOR, skrivet en eur brezoneg pobluz, eveljust, ha kaoz enni euz dolmennou ha menhirou...



#### AN DROUIZ MEUR

Hervez em-eus klevet, ar gomeidienn-ze a raio kalz vad deom.

#### AR BARZ-DIOUGANER

Eur vad 'bominabl. Ha me a bropoz e vezo roet d'ar skrivagner an titr a Varz-Salver.

## AN DROUIZ MEUR

Red e vezo dezañ ober ar goulenn.

## AR BARZ-DIOUGANER

Ya ! gouzoud a ran eo red da unan lakaad e gandidatur evid beza resevet er Gorsedd evel e toud an akademiou. Mez kaoud a ra deom e hellom, an taol-mañ, ober eun akrok d'ar reglamant evid ar vad a vezo bet great hag ar zervij rentet deom. Re lent eo evid goulenn, ha koulskoude e vefe enoruz konta anezañ en or renkou.

## AN DROUIZ MEUR

Diskuliet e vezo ho propozision goude diskuta e veritou.

## AR BARZ-DIOUGANER

Ar GORSEDD-DIGOR a vo eun taol terrup war benn paotred « Gwalarn » ; meritet o-deus beza sahet — tud a Bariz hag a leah all deut da droubli or renoz — tud hag e vefe great kavadennoù kuriuz en o etat sivil ma karfe deom-ni furchal.

Lavaret em-eus deoh e vijen bet berr. Kerkoulz eo din echui peogwir ne ran c'hoaz nemed komañs. N'on ket evid displega dre ar munud ar pezh em-eus c'hoant, pe e vefe nesaser deoh chom aze da zigori ho kinou dirazon, beteg kuzet an heol ha savet al loar. Mez, evid echui, anzavom hardi ha yudom ar wirionez dre fas ar bed : An distruj a rafont ne vezo ket distruj braz ma vez kavet tud a volonteiz vad da ampech anezo d'ober droug. Ni toud, memprout ar Gorsedd, ni a raio batu dezo, noz ha deiz, heb koll alan na kouraj ; ha ma en em unis ganeom pobl vad Breiz-Izel, ez om sur da reusisa. An Union a ra an Nerz. Konfians on-eus rag, evel ma lavar ar jañson :

*Quand c'est l'heure du branle-bas,  
Le Breton ne recule, cule,  
Le Breton ne recule pas.*

Hag hebdale, va breudeur ger, ar horn-boud a vouldo ar Viktor en Argoad hag en Armor.

*Stlakadeg ; youhadeg.*

OLL

Bis ! bis ! bis !

## AR BARZ-DIOUGANER

A vouldo ar Viktor en Argoad hag en Armor. (*Stlakadeg diehan. Ar barz-diouganer a zeh e dal*). Evid konklui, va breudeur ger, GWALARN eo ar wezenn villiget, mad da cheta barz an tan, ha c'hoaz e vezo tan fall.

OLL

Ya ! Ya ! D'an tan ! D'an tan !

EUR BARZ

Setu amañ an numero diweza.

## AR BARZ-DIOUGANER

Devit anezañ en ho ti ; an tan-mañ a zo eun tan simbolik. Drouiz Meur, on tad, ar bobl fidel a houlenn e vezo kondaonet GWALARN.

*Ar Barz-Diouganer a gemer an hanter kleze.*

Drouiz Meur, kinnig a ran deoh en ano a Vreiz-Izel, kleze ar roue Arzur, evid toullgova GWALARN war dolmen ar sakrifisou. (*Diskenn a ra.*)

## EUR BARZ

Goulenn a ran konje da gaozeal.

AN DROUIZ MEUR, *o sevel.*

Komzit.

## EUR BARZ

N'ema ket kleze Arzur en e bez ; gortozom eur hardeurig. Eat eer gand ar moto da gerhad an hanter all d'ar gar.

## AR BARZ-DIOUGANER

Gwelloh eo kondaoni heb koll amzer. Den ne oar ar pezh a c'hoarvez. Ar hleze-mañ, evel an tan, a zo eur hleze simbolik. Ar beg n'eo ket neseder zoken da seremoni ar sakr.

## AN DROUIZ MEUR

Goude prezegenn elokant ar Barz-Diouganer, n'heller ket retardi muih.

Evid d'an oll gouzoud n'eo ket dre jalouzi, na dre avi na dre gasoni eo e kondaonom, nemed dre vuzur a nesese eved salud Breiz-Izel, e lavarom dezo eo on intansion ker gwenn hag or zae ha ker pasifik hag or hleze diveg. Nemed pa vez dañjer e ranker kemer resolutionou braz. Setu perag, dirag or houstiañs ha dirag ar re veo hag ar re varo, e

## KONDAONOM GWALARN DA ZISPARISA.

Ra glevo an Arvor !

AN DIFAZIER, *d'ar barz-korner.*

Sonit evid ma klevo an Arvor.

*Ar barz-korner a c'hwez en e gorn-boud.*

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo an Argoad !

AN DIFAZIER, *d'ar barz-korner.*

Sonit ! (*Eun taol korn-boud.*)

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo bro-Geumri ! (*Ar barz-korner a zon.*)

## AN DIFAZIER

Kreñvohig ! Bro-Geumri a zo en tu all d'ar mor.

*Ar barz-korner a zent.*

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo Iwerzon !

*Ar barz-korner a zon.*

AN DIFAZIER, *d'ar barz-korner.*

Kreñvohig eged evid Bro-Geumri, hag un peu à gauche. (*Eun taol kreñv.*)

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo Enez Von !

*Ar barz-korner o vond da zeni.*

## AN DIFAZIER

Ne dalvez ket ar boan son. Enez Von a zo war hent Bro-Skos.

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo Bro-Skos !

## AN DIFAZIER

Sonit herr an taol-mañ. (*Ar barz-korner a zon*).  
Plus fort... beaucoup plus fort ! l'Écosse est loin  
d'ici !...

## AN DROUIZ MEUR

Ra glevo Bretoned ar bed-oll ! (*Ar barz-korner  
o vond da zení.*)

## AN DIFAZIER

C'est pas la peine ! le monde est trop loin de  
nous.

## AN DROUIZ MEUR

Setu amañ bremañ an *ordre du jour* :

Dirag Keltia,  
Dirag ar Bed-oll,  
Dirag ar re Veo hag ar re Varo ;  
En ano Arzur,  
En ano Marzin,  
En ano Matilin an Dall,

GWALARN A ZO KONDAONET D'AR MARO

Livirit oll ganin : Maro da WALARN !...

## OLL

Maro da WALARN !

## AR BARZ-DIOUGANER

Kondaonet dre gontumas.

## EUR BARZ ALL

Ya ! den n'eus kredet dond d'en em zifenn dirag  
ar Gorsedd.

## AN DROUIZ MEUR

Ha youhit oll ganin : Ra vezo milliget da virvi-  
ken !

## OLL

Ra vezo milliget... da... ra... virvi... vezo... milra...  
miraken... ravezo... ra... ravi... milvi... mil... milra...  
da... ra... ra... râ... ráââ... ráââââââââ...

KOR AR RANED, *evel eun hekleo.*

Rââââââââââ...

## AN DROUIZ MEUR

Maro mad eo.

He bremañ... (*d'an Drouiz-Kuzulier*) : Taolit eur  
zell war an hent. (*An Drouiz a zell*). Ha gweloud a  
rit an hanter all o tond ?

## AN DROUIZ-KUZULIER

An hent a zo dezert, Drouiz Meur !

## AN DROUIZ MEUR

Bremañ, evid derhel soñj euz an deiz memorabl-  
mañ, emaom o vond da zakri eur barz nevez, ha,  
goude koan, war ar belouzenn, e vezo great eur  
jabadao.

Diskibl nevez, c'hwi pehini en-eus goulennet an  
enor da wiska sae hlaz ar barz, glaz e-giz ar mor  
don, glaz e-giz an oabl, glaz e-giz mibien ho taou-  
lagad, pignit war an dolmen sakr evid ma tiskenno  
warnoh sperejou or hendadou. Didostait, diskibl  
Marzin, ma vefoh unan euz ar re a zalho ar brezoneg

en e zav, ker start hag an dervenn war ar roh, e bro goz ma zadou.

*Eun den koz, levitenn ha tok melon, a bign war an daol-vên.*

AN DROUIZ MEUR, *ankeniet.*

Ne deu ket c'hoaz an hanter all ?

AN DROUIZ-KUZULIER

Ne welan den war an hent, Drouiz Meur !

AN DROUIZ MEUR

Sellet mad ho-peus ?

AN DROUIZ-KUZULIER, *o selloud adarre.*

Eur paotr-saout hag eur vuoh a dreuz bremañ an hent.

AN DROUIZ MEUR, *d'ar barz nevez.*

Pe ano ho-peus ?

AR BARZ NEVEZ

Jean-Louis...

AN DROUIZ MEUR, *gand mall.*

Hoh ano bardig ?

AR BARZ NEVEZ

Ab-Domen.

AN DROUIZ MEUR

Ab-Domen... Eun ano nerzuz, eveljust. Ha setu ho-peus souetet gweloud merka hoh ano war listenn ar varzed ?

AN DIFAZIER

Répondez : Ya !

AB-DOMEN

Ya !

AN DROUIZ MEUR

Hag e touit e tifennoh Breiz atao... nann, paz atao... bepred e felle din lavaroud.

AN DIFAZIER

Bepred !

AN DROUIZ MEUR, *d'an drouiz-kuzulier.*

Ne deu ket c'hoaz an hanter all ?

AN DROUIZ-KUZULIER

Ne deu ket c'hoaz ! (*An Drouiz Meur a huana*). Ne welan nemed daou zen war an hent ; eun dañvad hag eur hi !

AN DROUIZ MEUR

Kanit kan ar varzed da hortoz. Bravoh e vo ar seremoni.

AR BARZ-KANER

Allo ! KAN AR VARZED ! deom dezi ! Unan ! daou ! tri !

## KAN AR VARZED

*N'eus ger ebed ; eur mouskan nemedken, faoz ha dre ar fri, war don « An Hini Goz ». Ar mouskan a bado eur munud. An Drouiz Meur a gendalh gand ardou al lid.*

## AN DROUIZ MEUR

N'eo ket erru c'hoaz ?

## AN DROUIZ-KUZULIER

N'eo ket erru c'hoaz ; mez dond a raio.

## AN DROUIZ MEUR

Ha ma n'ema ket er gar ?

## AR BARZ-KUZULIER

Er gar ema sur, peogwir eo bet expedit via Liverpool - Le Havre gand express.

AN DROUIZ MEUR, *enkrezet.*

Kanit an eil koupled euz kan ar varzed.

## AR BARZ-KANER

Kanom an eil koupled euz kan ar varzed.

## KAN AR VARZED

*E-giz uhelloh.*

AN DROUIZ MEUR, *o tihoanagi.*

*'M-eus aon ne deuo ket an hanter all ? Drouiz-Kuzulier, gwelit da weloud...*



AN DROUIZ-KUZULIER, *o selloud.*

N'eus nemed eur vran war an hent... Hogen dond a raio an hanter all : eur moto ne vez ket pell o troha rout...

AN DROUIZ MEUR

E peseurt tu euz an hent ema ar vran ? Daoust ha lammou a ra pe eur bale pozet ?

AN DROUIZ-KUZULIER *a zell adarre.*

Nijet eo kuit.

AN DROUIZ MEUR

Konfians em-eus neuze... Ar vran-ze a zo deuet da anonsi an hanter all.

AN DROUIZ-KUZULIER

Ya, dond a raio. Sur on.

AN DROUIZ MEUR, *laouenaet.*

Kanit eta ar han broadel.

AR BARZ-KANER

Allo ! Dao d'ar han broadel... Prest oh ? N'eo ket dizoñjet an ton ? (*Mouskana ra dre e fri evid rei dezo an ton.*) Mad ar jeu... Chut !... KAN AN DERVENN... D'an Drouized...

AN DROUIZED

*Me zo ganet en Arvor, war lein Menez Arre,  
Bet plantet eno gwechall gand an Aotrou Doue.  
Va mamm a oa eur wezenn, eur wezennig vihan-tre.*

AN DISKIBIEN  
*Tralala... laderidonra... Tralalalallenno...*

AR BARZ-KANER

Ha bremañ KAN AL LANN... D'ar Varzed...

AR VARZED, *seder evel eostiged.*

*Me eo ar fleurenn,*

*melen,*

*laouen.*

AN DISKIBIEN

*Tralala... laderidonra... tralalalallenno...*

AR BARZ-KANER

Eil koupled AN DERVENN... D'an Drouized.

AN DROUIZED

*Ma vijen bet diouharet 'vel gwazed or hanton,  
Me 'm-ije gwisket eur cheled, eur cheletenn vreton,  
Bodreou ha bragou braz 'vid moned d'ar pardon.*

AN DISKIBIEN

*Tralala... laderidonra... tralalalallenno...*

AR BARZ-KANER

An ovad... KAN AR BRUG.

AB-OMINABLE

*Me eo...*

Hum ! hum !



## AN DIVROAD

Ne veizan ket gwall-vad ar galleg ; komzit brezoneg din, mar plij ganeoh, aotrounez.

## AN DROUIZ-DIOUGANER

Me a gave din e oah euz Bro-Zaoz ? 'M-eus aon out Kernevod ?

## AN DIVROAD

N'on na Kernevad, na Breizad, na Saoz, aotrou... An Norvej eo va bro.

## DROUIZED, BARZED

An Norvej ?... An Nor... vej !...

## EUR BARZ

Hag ouzoh brezoneg ?... Dre peseurt mirakl ?

## AN DIVROAD

Desket em-eus ar brezoneg e skol-veur Oslo, dre lenn « Gwalarn ».

## OLL

« Gwalarn ? » ec'h, m'henn argas !

*Youhadeg.*

## AN DIVROAD, o vond kuit.

Hentet fall on bet.

## AN DROUIZ MEUR, goustad :

Hag an hanter all ?

## KOR AR RANED

Râââ !... râââ !...

## AN DROUIZ-KUZULIER

Foutu !...

## AN DROUIZ MEUR

Foutu !

*Aroun.*

## KOR AR RANED

Rââââââââââ...

## AN DROUIZ MEUR

Peoh a vo d'an trouz ?

## OLL

Ar Peoh a zo.

*An oll a chom simudet eur pennad.*

## AN DROUIZ MEUR, eet e wad da zour.

*(D'ar barz yaouank) :*

Pa ne deu... pa ne deu ket an hanter all, bouchit d'an hanter-mañ da hortoz, barz Ab-Domen. Soñjit ervad emma an hanter all e Breiz Tramor, hag e vo red deoh boucha dezañ, d'ar henta Gorsedd-Digor. *(Ab-Domen a bok gand e zioujod d'ar hleze diveg).* Toutit e tifennfoh Breiz at... be... pred.

## AB-DOMEN

Toui a ran... e tifennin...

AN DIFAZIER

Atansion ! paz Breiz atao !

AB-DOMEN

... Breiz... bepred.

AN DROUIZ MEUR

Touit eur wech c'hoaz.

AB-DOMEN

Toui a ran !

AN DROUIZ MEUR

Touom oll gand ar barz nevez war gleze Arzur.

OLL

Toui a reom !

AN DROUIZ MEUR

Parfed ! Barz nevez Ab-Domen, konsakret ganin-me, Drouiz Meur Ab-Attis, er bloavez 1929 evid derhel soñj euz an deiz memorabl, savit bremañ evid d'an oll anaoud ho pizach. (*Ar barz Ab-Domen a zav.*) Lennit.

AN DIFAZIER

Tu as ta poésie en mains ?... Lis, alors !

AB-DOMEN

Setu amañ ar boezienn savet ganin-me va-unan, evid beza resevet 'barz ar Gorsedd-Digor.

AB-DOMEN *a lenn*

*Paneved ar Gorsedd e oam boud.  
Mez ar Gorsedd en-eus hopet : Qui va là ?  
Hag arretet paotred Gwalarn en o roud.  
Yudom eta eun hourrah,  
Ha ra voundo ar horn-boud  
Ol levenez joiusa,  
Dre Vreiz-Izel toud.*

AN OLL

Bravo ! bravo ! bravo !

AB-DOMEN *a lenn*

Hé la ! hé la ! n'eo ket echu !  
Eur boezienn all em-eus komañset. Unan vodern :

*An ara  
a ra  
hara  
ki  
ri.*

*Lenn a ra :*

Klotennou pinvidig-mor eo penn-da-benn. Pa vezo echuet, me a garfe gouzoud piou a vezo an hini

*ki  
ri  
ra.*

AR RANED

Râââ...

AN DROUIZ MEUR

Mad ! it bremañ 'barz ho sae-varz.

Ar barz Ab-Domen en em lug en e zae hag a zispah...

Koueza ra e benn en a-raog, a-dreuz an daol-vên kartons. An arvesterien a c'hoarzo... emichans.

AN DIFAZIER, o kounnari.

Eh ben ! Y a pas de quoi rire.

AB-DOMEN, diouz an toull.

Y a pas de mal.

AN DROUIZ MEUR, war an ton braz.

N'eus droug ebed.

OLL

N'eus droug ebed.

An dud en em denn.

AN DROUIZ MEUR

Hep ! Gortozit eur munud. Gouel ar Gorsedd-Digor, reusiset ha kaer meurbed, en desped d'ar raned flêr, a zo echu, siwaz !... Bremañ emaoom o vond d'en em separi ha da lavaroud en eil d'egile eur henavo kaloneg, beteg ma en em gavim reuniset a-benn ar bloaz d'ar mare-mañ, e-kreiz eul lannenn all. Ar Gorsedd-Digor-ze a vezo ivez kaer-meurbed hag a gompreno eun nevezenti. Evid diskouez d'an dud ez om modern en desped d'ar jalouzi ha d'an teodou fall, ni a blanto e-kreiz al lanenn pemp menhir e simant houarnet. An amplasamant a vezo desidet d'ar henta Gorsedd-Kuz.



**SOAZ**

Che ! an dra-ze a vezo kaer !...

**KOR AR RANED**

Rââââââââ...

**LIEN****BOKED**

Ila setu penaoz Breiz oe salvet da viken.

*(An aotrou Bimbochet e Breiz).*

Rener ar Gelaouenn : P.-M. MEVEL

Moulet gand I.C.A., 21-23, strêd Jean-Jaurès - 29200 BREST

